

TIR HA MOR

BUGELIEZH EN NOAZH

Na krin ha sec'h
Ar c'heoteg holenek

Briataet out bet
Ha trelatet out bet
Gant troellennoù an avel
War da gorf diskramailh

An heol a gomz ouzhit
Hag a strobinnell da sell
An ebr o tañsal
A gendeuz gant da vouezh

Gwell e ve dit derc'hel
Da vont a-dreuz ar gwag
A-hed kammdroiennoù hoalus
An draezhenn o c'hrigoñsat

Betek al letonenn gristal
Ma kerzhi diastal
Pazenn-ha-pazenn
Davit goudor ar bineg

Goudor diamenn
Ar pinegi dic'hoarzh

Ma voe ken gwiv
Ma voe ken c'hwek

Ma voe ken sec'h
Ma voe ken hakr

Da vugeliezh en noazh

EMLED

Beg an aod ha froud ar stêr
Lamm ar reier
E-tal ar mor dall

Nep den neptu
Tro ar vourc'h ha tro ar vered
Vijeled ar goañv er Vro-Vigoudenn

Ar mor diroll o c'hrozmolat
Klemmigan ar gwag o tiverañ
War rivinoù chapel Lanc'hidou

Kezekenned fiñv ha difiñv
Kezekenned kenep
Kezekenned glas

Kezekenned ruz-tan
O peuriñ halo ar mor
Diskiant evel ur c'hi klañv

Ar glav war e c'hoar
O tiwadañ
Diwar ar sklent

Strafuilh ha trubuilh
Ar mor dispourbellet
E-harz Itron Varia Penhors

KERREG AMBREG

Noms de pays : le nom (Marcel Proust)

Tantad ar bezhin e-harz ar beziou

War an traezh distro
Mogedennoù gleb evel huanadennoù
A sav en noz a-droellennoù

En em silet eo ar gwag
Betek feunteun an aod
Diseblant bepred he santig kozh
Ouzh skiltradenn ruz ar morbiged

War e c'hoar emañ o 'n em ledañ
Diougan al loar
E poull sklinton ar stivell c'hlas

Pa vo erru er vro-mañ
Marevezh ar c'homzoù diwezhañ
E chomo neoazh ganti
Gant ar mor bepred
« 'Vel mur en he zro »
Anvioù kozh ar c'herregi

Hag en o lavarin
Pa vin o verdeiñ
Tro-dro d'an inizi

“Ar c’heloù”
“Tarledenn” ha “Kornôg gwenn”
“Ervidi”
“Bousvaen”
“Houarn marc’h”
Ha “Mein ambreg”

Hag a vouezh plaen o lavarin
Tro-dro d’an inizi
Evel ul letani
A vadelezh hag a druez

Evit hon yezh
A zo par d’ar mor ha par d’an douar
A zo par d’an dud ha par d’ar stered

Hag a vouezh digor o lavarin
Tro-dro d’an inizi
Evel ur veuleudi
A gevrin hag a vuhez

Evit hon yezh
A zo enni
Lavar ar Bezañ
Ha dislavar an Ezvezañ

E GOUUELED AR RIA

Chomet e oan da straniñ
E goueled ar ria
Da vare ar gousperoù
Gant esperañs ar goubanwel

Etre ar c'hregin glas hag ar poulligoù du
Etre al lec'hid ruz
Hag ar c'herregi mouk
Digenvez ha digavandad ac'hanon
Ganin bepred anken ha preder
Dindan bec'h ar poanioù diremed
Hag an amzer aet da get
En ur c'hortoz war ma goar dindan kann al loar
Distro didrec'hus an dourioù digalon

Kouezhet e oa bet en o foull
An atalieroù kozh
Hag a-hed ar c'haeoù distrujet
Houidi koujorn ar seizh avel
A veze ganto bremañ
Kement a blijadur
O kamm-kamm-kamm-kammigellat
War ar restachoù merglet
Hag ar bigi o vreinañ

E-barzh ar chanterioù goullo
E kleven o c'harmiñ
Diouzh Costa da Morte

An avellenoù yud
O mouezhioù dirollet
O heklevioù dichek
O treveziñ hep nep mezh
Birvilh bividik ar vicherourien a-gent
Ha kanaouennoù drant tasmant ar yaouankiz

Padal e veze o choual
Dizehan ar milinoù tredan
Greantel ha mezevellus
O zrouz rik
P'en em led didruez
Diouzh an torgennoù moal
A-dreuz brouskoad an diribinoù krin
Falc'hadennoù o avellennoù dir

P'emañ sac'het da viken
Regennad ar milinoù-rod
A dregerne gwechall
O zalmoù
Palvad-ha-palvad
E-mesk an dourioù boull
Gant nerzh ar froudenn serzh

Garanet e oa em spered
Soñj al luc'hskeudennoù kozh
Didroc'het pervezh
O selloù prendennus
Diouzh ar frammoù garlantezet
A oa ken brav da welet e skeud ar ganastell

Taolet bremañ war zispleg
A-hed ar vali varmol
Stok ouzh an traezh
Badaouellus

Keit ha ma tifret
Tro-ha-tro ar pavez
E breskenn an hañvezh
An douristed dall, bouzar ha mut

Seizet ha divouzellet war ar panneloù cheuc'h
Ar sonerion gaita
Ar sonerion flaouit
An daboulinerion
Margodennoù ar meurlarjez
Ar maouezed didrugar
Gant o c'horfoù mac'hagnet
O dremmoù teñval hag o anken digened
Dorn-ha-dorn gant o bugale vresk
Klañvidik
Ha lentik o mousc'hoarzhig
Dic'hoanag o hunvreoù
Dilu
E-tal ar mor hakr ha du

Chomet e oan da straniñ
E goueled ar ria
War roudoù an hent strizh
E-mesk ar broennegi
Damguzhet ar mor bras
E pleg ar c'hoajoù du
Hag e morfank ma hurlink

E kerzhen a-dastorn
Mouchet ma daoulagad
A-dreuz an touell
Hag an didouell
A-hed riboulioù gwad
Dindan red ar stered